

Au fol^o 237 recto, seulement le titre :

(237 recto)

ar Geldon bras

[rien aux fol^o 237 verso et 238 recto.]

(238 verso)

Er Geldon bras.

Et er Geldon bras da Razon
Hag e montet vel eur Baron!

Gentio arc'hant, ha mantel vras
Eur dip. ler fin hag e eur goas!

Et er Geldon d ar Parlamant
Daoust hag e retorno Kontant

Oh ia mar gone he Brocès
War varhadouriey an Indres.

Retorn ra el Geldon der Ger
Hag en hanval eus eur roulier

(239 verso)

Strapet e vin, hir he varo
Dour a bouillen eus he seulio.

Pa wa voar an hent a tonet
Eur vagerey neus rankontret.

Neus rankontret eur vagerey
War he brech eur buzelik kez.

— O plac'hik koant dime leret
O humannik pelec'h e het?

128

— Orio Geldon a mont a ran
D'an hostaliri da lojan

Da lojan d'an hostaliri
Ma deut ive e vefomp tri.

Ar Geldon bras a lavare
An ti ar SKaon pa digoëe :

(240 verso)

— Laret dime hostizez koant
A lojan ret evit arc'hant ?

O diskennet a deut an ti
Me meus eur vray hostaliri.

Aman tisken ar vourhijen
Pa vent war an hent o tremen.

An dud jentil a ra ive
Pa vent bars ar koat a chasse.

Me meus gwinn mad a bara gwen
Daou voele fresq ar gamb-velen.

Ar Geldon bras a lavare
D'an hostizez hag an nos se :

(241 verso)

— Leket er ber ha gret cher vad
Evit ma groëk ha mab ma zad.

Alumet tan ar gamb-velen
Evit sec'han ma c'haillaren.

Ar vagerezh a lavare
D'an hostizez deus ar beure :

— Roët tu din hostizez koant
Ar valijen hag an arc'hant.

Evit ma c'hi me prontamant
Da vunc'h d'ober eur beamant.

242 verso)

Retorn a rin na vo ket pell
Da glasq m' osac'h ha ma bugel.

Er Geldon bras a lavare
D'an hostizez var dro Kreis de :

— Roët tu din hostizez koant
Ma valijen ha ma arc'hant.

Evit ma hi me prontamant
Da venec'h d' ober eur beamant.

— Ho valijen d'ac'h na rin ket
Rag do kroëk he meus i roët.

— Para c'heus groet Otro Doue
Gounes ne ne ket groëk dime.

243 verso)

— O falloc'h den a hout a se
Koustet ganti e neur goële.

Koz a fronter me o tisko,
D'ober dismegañs d'an dudo.

Ha ma na beet ho skoden
Me viro marc'h ha bagajen.

Tout a virin, mert eur bugel
Zo durman, harmat n'he gavoël.

Ar Geldon bras a lavare
Tost deus er ger pa n'arie.

— Otro Doue patra herin
D'am groëk er ger pa n'arün?

244 verso)

Kollet ma quir er Parlamant,
Kollet ma marc'h a ma arc'hant

Koustet e din ouспен mil skoët
eun nosvezet amouroustet.

130

ha Kavout di digas d'am groët
eur bugelek ne deus ket groet.

̄
)

[trad. franç. de ce texte,
par Penguern,
aux fol^{os} 239-244 rectos, et 244 verso.]